

CAHIER PEDAGOGIQUE  
BIMESTRIEL


N° 13  
Mai-Juin 1968  
2<sup>e</sup> Année

Rédaction, Correspondance :

« SKOL VREIZ »

Place de la Madeleine  
29 N — MORLAIX

Administration : « SKOL VREIZ », 6, rue  
Neptune, Brest.  
C.C.P. 2248-25 RENNES.




KANAOUENNOU  
AR VRO :

## SONIOU-POBL

dibabet gand Fañch DANNO  
evid yaouankizou Breiz

Eil lodenn



# KANAOUENNOU AR VRO : SONIOU-POBL

*dibabet gand Fañch DANNO evid yaouankizou Breiz*

*Voici la seconde partie du recueil de CHANTS populaires choisis par Fañch DANNO pour la Jeunesse bretonne.*

*Les Chants de la première série, publiés dans le N° 10 de « SKOL VREIZ » conviennent pour les enfants des classes élémentaires et du 1<sup>er</sup> cycle.*

*Ceux-ci serviront plutôt aux grands élèves du 2<sup>e</sup> degré, aux groupes des Foyers et Maisons de jeunes, des Cercles Celtiques, etc...*

*Un bon nombre de ces chants (N°s 25 à 37) sont des « Kan ha Diskan ».*

*On voudra bien se reporter aux observations de l'auteur dans l'Introduction placée en tête de la première partie.*

## SKOL VREIZ - L'ÉCOLE BRETONNE

**CAHIER BIMESTRIEL  
POUR L'ENSEIGNEMENT REGIONAL BRETON**

**Abonnements :**

- **Un exemplaire** (6 numéros avec suppléments) : **12 F.**
- **Abonnements d'école.** - Deux exemplaires : **22 F** - 3 ex. : **32 F** -  
4 ex. : **40 F** - 5 ex. : **48 F** - 6 ex. : **55 F.**

(Paiement par mandat administratif ou municipal)

**SKOL VREIZ, 6, rue Neptune, Brest — C.C.P. 2-248-25 RENNES**

## 19.

## P'oan o tiskenn da Vontroulez



P'oan o tiskenn da Vontroulez, Direi dira, ladirei trala-



-lal P'oan o tiskenn da Vontroulez, Me 'remerkaz va mestrez.

P'oan o tiskenn da Vontroulez  
Direi, dira, ladirei tralala  
P'oan o tiskenn da Vontroulez  
Me remarkaz va mestrez.

Ma mestrezig 'vond david dour...  
Ha me o vond d'he zikour.

Da zikour pignad ha diskenn...  
Ar podad diwar he fenn

Ha me houlennas diganti...  
Hag-eñ doa c'hoant dimezi

Hi ober eun tammig hij-skoaz...  
Hag o komañs da ouela.

Ma dousig koant na ouelit ket...  
Ni vo on-daou dimezet.

Ni yel on-daou d'an Normandi...  
Da zerhel ostaleri

Warhoaz ni en em ambarko...  
War eur vag 'vid Sant-Malo

Da Zant-Malo pe Sant-Brieg  
'Vid deski mad ar galleg

Pa oem erru e Sant-Brieg...  
Oa lodennet ar galleg

E oa greet e lod d'ar galleg...  
Hag ive d'ar brezoneg.

Skrivet galleg war baper gwenn...  
Da lakaad em jiletenn

Med ma jiletenn a oa toull...  
Koueet ar galleg er poull

Ha kaer am-moa toui Doue...  
Bretoned oem koulskoude.

*Kanet gand Katell ar Gwern  
(Poullaouen).*

## Perag peus ma dimeet ?




Perag peus va dimeet, ma mamm? Na pegen brao, na pegen brao, O! Pe-



-rag peus va dimeet, ma mamm? Na pegen brao boud plah yaou-



-ank! Ma halon 'zo heb nehamant, O! Ma halon zo heb neha-



-mant, O! Ne rin ganti evid arhant, O! Perag peus va di...

Perag peus ma dimeet, ma mamm ?  
Na pegen brao na pegen brao, o !  
Perag peus ma dimeet, ma mamm ?  
Na pegen brao boud plah yaouank !

Ma halon zo heb nehamant, o ! (2w)  
Ne rin ganti evid arhant, o !  
Perag...

Me 'm-eus he roet 'vid netra, o !  
Na din-me servij 'bed ne ra, o !

Me 'm-boe eur galon ken tener, o !  
'M-eus he roet d'eur bimbocher, o !  
.....

A ya d'an davarn mintin mad, o !  
P'erru er gêr, noz diwezd, o !

P'erru er gêr, noz diwezd, o !  
E tap eur vaz 'vid va filad, o !

Tapoud eur vaz me 'ra ive, o !  
Sellit brema peseurt buez, o !

Sellit brema peseurt buez, o !  
Ha leun an ti a vugale, o !  
.....

Ar vamm n'eo ket hoaz tregont vle, o !  
An tad zo yaouank flamm ive, o !

Perag peus ma dimeet, ma mamm ?  
Na pegen brao, na pegen brao, o !

Perag peus ma dimeet, ma mamm ?  
Na pegen brao boud plah yaouank !

(Diembann).

\* Boud : beza (bea).

\* Tregont vle : tregont vloaz.

## 21.

## Teir plah yaouank a Landevan...

Teir plah yaouank euz Lan-de-van, loñla, Teir  
 plah yaouank euz Lan-de-van Teir plah yaouank euz  
 Lan-de-van Eet da bourmen d'an O-ri-ant.

Teir plah yaouank euz Landevan, loñla,  
 Teir plah yaouank euz Landevan, (2w)  
 Eet da bourmen d'an Oriant.

En Oriant p'oant erruet, loñla,  
 En Oriant p'oant erruet, (2w)  
 Eur vatimant 'doa remerket.

Eur vatimant 'doa remerket, loñla,  
 Eur vatimant 'doa remerket, (2w)  
 Batimant ha martoloded !

Ar yaouankañ, an hardisañ, loñla,  
 Ar yaouankañ, an hardisañ, (2w)  
 A lammas er vag da gentañ.


Er vatimant 'r wech oa lañset, loñla  
 Er vatimant 'r wech oa lañset (2w)  
 Triweh ganti oa ambarket.

Ar plahig paour-mañ a ouele, loñla,  
 Ar plahig paour-mañ a ouele (2w)  
 Ar habiten he honsole.

Tavit, plahig, na ouelit ket, loñla,  
 Tavit, plahig, na ouelit ket.  
 Rag ho puez ne gollfet ket.

Rag ho puez ne gollfet ket, loñla,  
 Rag ho puez ne gollfet ket (2w)  
 Hoh enor, ne lavaran ket.

*Kanet gand D. Banniel  
 (An Drinded-Langoned).*



Eul la-pousig er hoad, melen e ziuaskell Eul la-pousig er  
 hoad, melen e ziuaskell A ziskenn beb mintin war gornig  
 va mantell, A ziskenn beb mintin war gornig va mantell.

Eul lapousig, er hoad, melen e ziuaskell, (2w)  
 A ziskenn beb mintin war gornig va mantell, (2w)

Hag e lavar kalz traou din war benn va dimezi :  
 — Mar timeez er bloaz-mañ, na gemer ket eun intañv,

Rag kalon eun intañv zo e chagrin noz-ha-deiz ;  
 Kalon eun den yaouank a zo laouen ha ge.

— Deut ganin 'ta, plah yaouank, war vourz va batimant,  
 Ha ni vo pinvidig en aour hag en arhant.

— Ma zad, neuze, ha ma mamm ne vint ket sur  
 [kontant,  
 M'am welfent-me ganeoh war vourz ho patimant.

— Ho tad, neuze, hag ho mamm a jomo barz ar gêr,  
 Ha ni yelo on-daou da vro an Angleter.

— Gwelloh vefe ganin 'n em daol e barz ar mor  
 'Vid mond d'an Angleter ha kollet va enor.

(Diembann).

23.


## Pa oan o tremen Koad-an-Noz



Pa oan o tremen Koad-an-Noz, Tombelo, Pa oan o tremen Koad-an-



Noz, Me 'gleve son an hanter-noz, Tombelo tambelle menette, O



yae o gling gling gling, Tombelo tombelo-bo!

Pa oan o tremen Koad-an-Noz, *tombelo !*  
 Pa oan o tremen Koad-an-Noz,  
 Me 'gleve son an hanternoz.  
*Tombelo tambelle menette,*  
*O yae, o gling gling gling,*  
*Tombelo tambelobo.*

Glao hag avel ouz va filad...  
 Na ken a dreuze va dillad...

Teir leo hanter on deuz he zi  
 Ha pa ve peder mond a rin...

Pa 'h erruis e toull an nor,  
 Lahet goulou, kousket an oll.

Na muia tra va honsole,  
 Alan va dous, deuz he gwele.

Alan va dous, deuz he gwele,  
 Errue ganin dre doull 'n alhwez.

— Ma dous koant digorit ho tor...  
 'Mañ ho servicher 'houl digor...

— Digorin ket d'ar houlz-mañ 'n noz :  
 Digand va zad am-befe kroz.

It da varchosi va hezeg  
 David ma mevel da gousked.


(Diembann).

24.


## M'anaou eun den yaouank



M'anaou eun den yaouank A gar eur plah yaou-ank, A



gar eur plah yaouank. Pa 'neus gounezet he halon, a-ne-zi



Yann a ra goap. Pa 'neus gounezet he halon anezi Yann a ra goap.

M'anaou eun den yaouank,  
A gar eur plah yaouank. (2w)  
Pa 'neus gonezet he halon, (2w)  
Anezi Yann a ra goap.

Mez netra ne honez  
'Vid ober kement-se. (2w)  
Rag eun devez zo da zoned, (2w)  
Hi 'ray anezañ ive.

— Bonjour deoh va mestrez !  
Bonjour deoh e laran ! (2w)  
Na forz joaüz eo ho kalon  
Bemdez ho klevan o kan.

(Kanet gand Zaig Monjarret).

\* M'anaou : me a anavez.

## 25. Biskoaz 'm-oa c'hoarzet kemend-all



Biskoaz 'moa hoarzet kemend-all 'Vel e Poullaouen an deiz all!



O ta ma Doue, ma Doue, ma Doue! O ta ma Dou, petra Dou-e ta!

Biskoaz 'm-oa c'hoarzet kemend-all  
'Vel e Poullaouen an deiz all.  
O ta, ma Doue, ma Doue, ma Doue,  
O ta, ma Dou, petra Doue ta !

'Wel'd ar biniou gand ar person  
E-barz ar gador o sermon...

'Benn eur pennadig, goude-ze,  
'Wel'd ar vombard gand ar hure...

Wel'd an 'ni goz o ribotad  
Serret ganti he daoulagad...

Seiteg pe driweh logodenn  
Lammas er ribod war o fenn...

Ma lar ar mevel d'ar vatez :  
— Chach war o lost ma teuint er-mêz !

« Kan ha Koroll » (Ar Falz).

## 26. 'Tond d'ar gêr euz a Rostren



'Tond d'ar gêr euz a Rostren, 'Tond d'ar gêr euz a Rostren,



'Tond d'ar gêr euz a Rostren Oa koueet ma buoh barz ar vouillenn

'Tond d'ar gêr euz a Rostren, (5gw)  
Oa koueet ma buoh 'barz ar vouillenn.

Me dapas eur bali-forn (5gw)  
Da skoi warnei gand ma daouzorn

Dre ma skoen war ma lon,  
E hee e-barz don-ha-don.

Me 'dapas eur hoz kordenn  
Ha tôl 'nei dei war he fenn.

'Moa ket greet med eur chach krenn,  
Deut ma buoh mêz ar vouillenn.

Me a lampas war he hein,  
Ha yao d'ar gêr da glask ma lein.

« Kan ha Koroll » (Ar Falz).



An Aotrou Person 'neus choanteet Eun anduillenn bet er moged. |



Ho-po-pop n'eo ket gwir an dra-ze, O geo da gwir awalh e oa!

An Aotrou Person 'neus c'hoanteet  
Eun anduillenn bet er moged. (2w)  
Hopopop n'eo ket gwir an dra-ze,  
O, geo da, gwir awalh e oa !

Kaset ar vatez prontamant  
Da houlenn anduill 'vid arhant.

Pa oa poazet ha poazet mad,  
E voe digaset war eur plad.

Pa voe rannet dre an hanter,  
Ne bade den gand c'hwez ar flaer

Pa oa deut Pask en amzer vad,  
Annaig Rouz da govesaad

— C'hwi n'ho-po ket an absolvenn  
Abalamour d'hoh anduillenn.

« Kan ha Koroll » (Ar Falz).



'H an da lar'd eur ganaouenn pehini n'eo ket gwall hir.  
'H an



Me a roy ma goug da droha ma zo 'barz eur poz gwir!

'H an da lar'd eur ganaouenn  
Pehini n'eo ket gwall hir : (2w)  
Me a roy ma goug da droha  
Ma zo 'barz eur poz gwir. (2w)

Disul vintin p'oen savet  
Oa 'r hloh 'son d'ar gousperou,  
Me a lampas barz eur berenn  
Da hijal avalo.

Kaer 'm-oa hijal ha hijal,  
Ne goueze mann med mouilhi,  
Erruas pôtr ar berenn :  
— Na petra rit d'am brini ?

Tapas eur mên en e zorn  
Ha foueltas' nañ dre ma dal :  
Benn ma oen bizitet mad,  
Oen bloñset en kov ma gar.

*Kanet gand Henry ha Guilcher (Groñvel).*



Pôtrig, pôtrig an douar nevez, ladira, la, tralalala



Pôtrig, pôtrig an douar nevez, Hag-eñ eo brao beza aze?

— Pôtrig, pôtrig an douar nevez

*Ladira, la, tralalala,*

Pôtrig, pôtrig an douar nevez

Hag-eñ eo brao beza aze ?

— Braoig, brao, brao, en em gavfen...

Ma ve ganin n'hini garfen.

— M'emañ ho koant barz an dachenn...

Lakit ho tornig war he fenn,

Lakit ho torn en he hini

Ez ay ganeoh heb diferi

.....

An teir steredenn da greiste

Ha peb a bok en amitie,

Ha peb a bok ha peb a dro

Evid kuitaad an tachennou.

*Kanet gand ma mamm, Mari Baskiou. F.D.*



Me 'zo eur serjant-major 'Tistrei deuz an ar-me.



Laouenêt eo va halon, la la la la la la la



la la la la la la Em bro on a-dar-re!

Me zo eur serjant-major  
'Tistrei deuz an arme (2w)  
Laouenêt eo va halon,  
La, la, lalalala, lala  
Lalalalala,  
Em bro on adarre ! (2w)

E-pad pevar bloaz hanter  
On chomet divroet. (2w)  
Ha skuillet am eus dêlou,  
La, la, lalalala, lala  
Lalalalala,

Kalz am-eus gouzañvet !

P'edo va zro da ziwall,  
War ar menez uhel,  
Va spered a zistroe...  
Etrezeg Breiz-Izel !

Leusket am-boa war va lerh  
Bleunienn va harantez,  
Evid mond da vrezeli...  
Kant leo diouz va farrez !

Eiste 'raog en em guitaad,  
Oam atao a-gevred,  
Hag eur zulvez goude koan...  
Hi he-deus lavaret,

Dêlou en he daoulagad,  
He mouez hanter fraillet :  
« — Petra rin-me, den yaouank...  
Pa vim dispartiet ?

— Diwar vremañ 'z on o vond  
Da ober pinijenn,  
Da lakaad livajou du..  
War va dillajou gwenn.

(« Digor an abadenn », Ar Falz).



Disul 'barz an over'n- bred Krena rêas va ha-lon



E klevet eun or-do-nañs Lennet gand ar per-son.

Disul 'barz an over'n-bred  
Krena 'reas va halon  
E klevet eun ordonañs  
Lennet gand ar person.

E klevet eun ordonañs  
Lennet gand ar hure,  
Na toud ar bôtred yaouank  
Dond da zervij ar roue.

Da zerviji ar roue  
Da zouten an armo,  
Ha ma dousig Fransezañ  
Er gêr ne ree med gouelo

Tavit, tavit, Fransezañ,  
Tavit, na ouelit ket;  
Benn eun daou pe eun tri bloaz,  
Me 'deuy hoaz d'ho kweled.

Tremen oa an dried bloaz  
Nag ar berved ive,  
Nag ar martolod yaouank  
Ne zeue tamm da vale.

Ar plahig a oa yaouank  
A gave hir he amzer  
He-doa lakêt barz 'n he soñj  
Da zimezi 'darre

Dimezet hag eureujet  
Ouz an daol o koaniañ  
Erruas ar martolod  
En ti da houl lojañ.

*Kanet gand an Itronezed Duro ha Guedon (Groñvel).*

'N eur gêrig wenn traoñ ar mene E-mañ va dous va ha-ran-

'N eur gêrig  
-te. O tralala la lalalalalala la lala la

lalala lei O tralalala lalala lalala la lala la lalalalo!

'N eur gêrig wenn 'traoñ ar mene  
Emañ va dous, va harante !  
O tralalala lalala lalala  
La lala la lalala lei  
O tralalala lalala lalala  
La lala la lalala lo !

Hanter kant nozvez eh on bet  
E toull he dor, ne ouie ket !

Glao hag avel ouz va foueta  
Ha ma dillad o tivera !

Barz fin an noz me he gwelo,  
Pe va halonig a vanko !

Va halonig n'eo ket manket,  
Ma mestrez koant am-eus gwelet !

(Diembann).

Tri marto-lod yaouank Tralala, ladigatra, Tri mar-to  
 -lod yaouank o voned da vea-ji, Tri marto-ji O voned da ve-  
 -a-ji GE o voned da ve-a-ji, -a-ji, Gand 'n a'el oant

Tri martolod yaouank, *tralala, ladigatra*,  
 Tri martolod yaouank o voned da veaji,  
 O voned da veaji, ge, o voned da veaji,

Gand 'n a'el oant bet kaset...  
 Beteg an douar nevez...

E kichen meill ar Veill...  
 O-deus mouillet 'n eoriou...

Hag e-barz ar veill-ze...  
 E oa eur zervijourez...

Ha hi 'houlenn ganin...  
 — Peleh 'peus greet konesañs...

— E Naoned, er marhad...  
 En eur choazi eur walenn...

Gwalenn ar bromesa...  
 Ha par om da zimezi...

— Ni 'zimezo on-daou...  
 Ha pa n'eus ket avantaj...

— Ma mamm c'hwi zo 'n hoh êz  
 N'ouzoh ket piou zo diêz.

— N'on-eus na ti na plouz,  
 Na gwele da gousked en noz ;

N'on-eus na skuell na loa,  
 Na danvez d'ober bara.

— Ni 'ray 'vel ar glujar  
 Ni 'gousko war an douar.

(Diembann).

Tri marto-lod yaouank Tralala, ladigatra. Tri mar-to  
-lod yaouank o voned da vea-ji Tri marto- ji O voned da ve-  
-a-ji GE o voned da ve-a-ji, -a-ji. Gand 'n a'el oant

Tri martolod yaouank, tralala, ladigatra,  
Tri martolod yaouank o voned da veaji,  
O voned da veaji, ge, o voned da veaji,

Gand 'n a'el oant bet kaset...  
Beteg an douar nevez...

E kichen meill ar Veill...  
O-deus mouillet 'n eoriou...

Hag e-barz ar veill-ze...  
E oa eur zervijourez...

Ha hi 'houlenn ganin...  
— Peleh 'peus greet konesañs...

— E Naoned, er marhad...  
En eur choazi eur walenn...

Gwalenn ar bromesa...  
Ha par om da zimezi...

— Ni 'zimezo on-daou...  
Ha pa n'eus ket avantaj...

— Ma mamm c'hwi zo 'n hoh êz  
N'ouzoh ket piou zo diêz.

— N'on-eus na ti na plouz,  
Na gwele da gousked en noz ;

N'on-eus na skuell na loa,  
Na danvez d'ober bara.

— Ni 'ray 'vel ar glujar  
Ni 'gousko war an douar.

(Diembann).

# 34. Ma halon a zo fraillet



Ma halon a zo fraillet Dre nerz ma en-kre-zou



Ma daoula-gad en-ta-net la la la la la la la la



Ma daoula-gad en-ta-net N'o deus mui a zae-lou.

Ma halon a zo fraillet dre nerz ma enkrezhou ;  
Ma daoulagad entanet n'o-deus mui a zaelou.

Deut eo siwaz an devez ma rankan dilezel  
Leh kaer ma bugaleaj, ma bro gaer Breiz-Izel.

Kenavo, muia-karet, ma dousig koant Mari,  
Eur blanedenn diremed a zeu d'on glahari.

Ne welin ken da lagad ken lemm ha ken laouen  
O virvi gand plijadur en ti pa erruen,

Da zornig gwenn ken mibin o trei ar harr endro,  
Da vouez flour mui ne glevin, o kana ma gwerziou.

Kenavo, ma mamm, ma zad, brema n'esperit mui  
E chomfe ho mab karet da harpa ho kozni.

Evid gonid deoh bara 'vel m'hoh-eus grêt dezañ,  
Al lezenn zo didruez, ho kuitaad a rankan !


*Prosper PROUX (Ton diembann).*

## 35.

## P'edon war bont an Naoned



P'e-don war bont an Nao-ned, GE, Si sa-kre dou-ble



dao-net An deiz all o ka-na, Vi-ve la pip' et le tabac,



An deiz all o ka-na, O viv' la ta-ba-tiè-re!

P'edon war bont an Naoned, *ge !*

Si sakre double daonet ! (2w)

An deiz all o kana,

*Vive la pipe et le tabac !*

An deiz all o kana

*O viv' la tabatière !*

Me 'welas eur verjelenn, *ge !*...

War ar pont o ouela...

Petra peus 'ta, plah yaouank, *ge !*

Petra ra dit gouela ?...

— Va gwalenn-aour, emezi, *ge !*

Zo koue't er mor amañ...

— Petra roi din plah yaouank, *ge !*

Me yelo d'he zapa.

— Hanter-kant skoed, emezi, *ge !*

Em-eus em yalh amañ...

'Vid ar henta ploñjadenn, *ge !*

Netra gwelet e oa...

'Vid an eilved ploñjadenn, *ge !*

'R walenn touchet e oa...

'Vid an drede ploñjadenn, *ge !*

Ar paotr, beuzet e oa...

An tad a oa er prenestr, *ge !*

A ziroll da ouela !...

(« Digor an abadenn », Ar Falz).



E kichen Toull-ar-Boudou, du-hont war ar me-nez



Ez eus eur hoz ke-me-ner, so-toh 'vid eur vo -tez



Ez eus eur hoz ke-me-ner, sotoh 'vid eur vo-tez.

E-kichen Toull-ar-Bodou,  
Du-hont war ar menez, (2w)  
Ez eus eur hoz kemener  
Sotoh 'vid eur votez. (2w)

Evid mond da zevezia  
'Neus prenet eur gazeg. (2w)  
Da lun kenta miz ebrel  
Eo chomet genaoueg. (2w)

Da lun kenta miz ebrel,  
O tremen 'biou Pont-Mên,  
Ha kazeg ha kemener  
Zo chomet er vouillenn.

— Kerzit buan Marjanig  
Redit, Marjanig baour,  
Vid sikour ar hemener  
Zo chomet barz an dour.

— Kasit ganeoh eur rastell,  
Eur forh, eur gordenn vad,  
Marteze ni a hello  
O zacha war ar prad.

Hag en hent, ar hemener,  
Straket 'vel eur barbed  
Eñ a halvas e vaouez  
Da zeha e roched.

Eur havr e-noa Juluan  
Hag al loen milliget  
Eur gwall daol a zistagas  
E leh ne felle ket.

Evid kant skoed a dachou  
Ha kemend-all a ler  
Zo êt gand ar hemener  
Da benselia e rer.

(« Digor an abadenn », Ar Falz)

37.

## Nag en tu all da Bariz

Nag en tu all da Ba-riz, Nag en tu all da Ba-riz Nag  
 en tu all da Ba-riz, Nag en tu all da Ba - riz Ez  
 eus eur plah yaou-ank Far-li far-laoñ o bim bam baoñ Ez  
 eus eur plah yaou-ank, A - lo far-la-ri-dè-no.

Nag en tu all da Bariz (4 gw)  
 Ez eus eur plah yaouank  
 Farli farlaoñ, o bim bañ baoñ,  
 Ez eus eur plah yaouank  
 Alo farlarideno.

He-deus daou, tri amouros;(4 gw)  
 Me oar he zantimant  
 Farli farlaoñ, o bim bañ baoñ  
 Me oar he zantimant  
 Alo farlarideno.

Ar henta zo keginer,  
 An eil zo paotr a gambr...

An trede a zo kere,  
 Kere botaouer-ler...

Hag e-neus greet eur botou,  
 Demeus a ler lijer...

Ha pa oa greet ar botou  
 D'o has d'ar gêr eo eet.

'N eur êsea ar botou,  
 Dezi e-neus laret :

« O me 'garje, koantennig,  
 Be' ganez dimezet ».

(« Digor an abadenn », Ar Falz).



D'an daou war-nugent a viz du Diwallit mad mignon alo D'an



daou war-nugent a viz du 'Tiskennas Saozon en Dour-du.

D'an daou-war-nugent a viz du,  
 Diwallit mad mignon, *alo* !  
 D'an daou-war-nugent a viz du,  
 'Tiskennas Saozon en Dourdu.

Barz en Dourdu p'int diskennet,  
 Diwallit mad, mignon, *alo* !  
 Barz en Dourdu p'int diskennet,  
 Eur plah yaouank o-deus laeret.

O-deus laeret eur plahig koant...  
 'Vid kas gante d'o batimant.

Marivonig oa heh ano...  
 Genidig oa euz Plouigno.

Keno ma mamm, keno ma zad,  
 Biken n'ho kwel' ma daoulagad.

Tavit, ma merh, na ouelit ket,  
 Rag ho puez ne gollfet ket.

Kanet gand Loeiz ROPARZ.

Teñval an noz barz ar gêr-mañ. lanlurdi, Teñval an noz barz ar  
gêr-mañ. Teñval an noz barz ar gêr-mañ: N'hini garan neket amañ.

Teñval an noz barz ar gêr-mañ,  
*Lan lur din*  
Teñval an noz barz ar gêr-mañ,  
Teñval an noz barz ar gêr-mañ,  
'N hani garan neket amañ.

'N hani garan zo partiet...  
Me garize ne vefe ket !

Me garize beza gantañ...  
Da zervicha Napoleon.

Med ar roue bermetfe ket...  
Bouzar vije gand ar merhed.

Oa ket hoa' tri miz oa partiet...  
Eul lizer din noa digaset.

Ma zad, ma mamm noa e lennet...  
Me, plah yaouank, 'm-boa ket gouiet,


Ken hanternoz, noz ma eured...  
Ma hoñsorted din noa laret :

Ma hoñsorted din noa laret...  
—Plahig yaouank, c'hwi zo treiset !

Ma zad, ma mamm vo ken koz mad...  
Ma vin maleüruz en menaj.

*Kanet gand an Itron LE ROUX, Langoned.*

\* *Me garize : me a garfe.*



Ar zonig-mañ oa sa-vet en eur dond gand an trêz Euz  
a bardon Sant-Mi-kel, leh ma oa ma mes-trez. Pa  
welañ o tond ar mor, ne rafen van e-bed Da  
veza beuzet en-nañ, ma n'am se-laou -er ket.

Ar zonig mañ oa savet en eur dond gand an trêz  
Euz a bardon Sant-Mikêl, leh ma oa ma mestrez.  
Pa welan o tond ar mor, ne rafen van ebed  
Da veza beuzet ennañ, ma n'am selaouer ket.

Ma botou koad 'm eus kollet, roget va zreidigou  
O vond da heul va dousig er parkou, er hoajou,  
Pa ve ar glao, ar grizill, an erh war an douar,  
Kement-se n'eo ket eun harz da zaou zen en em gar.

— Me a zo bet, ma dousig, oh ho tarampreded  
Evel ma ve an eostig war ar spern-gwenn kludet :  
Pa fell dezañ paoueza, 'teu an drein d'e bika,  
Neuze 'sav war beg ar brank hag e teu da gana.

Ma steredenn zo kaled, ma stad zo dinatur,  
N'em-eus bet war ar bed-mañ nemed displijadur ;  
N'em-eus na kar na mignon, siwaz, na mamm na tad,  
Na kristen war an douar hag a garfe ma mad.

(« Barzaz-Breiz »).

The musical score is written on three staves in G major (one sharp) and 2/4 time. The first staff begins with a mezzo-forte (mf) dynamic and ends with a piano (P) dynamic. The lyrics are: "Bet zo bet eun amzer, eun am-zer dre-me-net, eun amzer dremenet, E karen, e karen, hag e vezen karet latira! E karen, e karen, hag e vezen ka-ret."

Bet zo bet eun amzer, eun amzer dremenet,  
 Eun amzer dremenet  
 E karen, e karen, hag e vezen karet, *latira* !  
 E karen, e karen, hag e vezen karet.

Bet zo bet eun amzer, e tougen teir zeizenn,  
 E tougen teir zeizenn,  
 Unan ruz, unan glaz, an arall a oe gwenn...

Setu me dimezet, ha setu ni kontant...  
 Lakeet en or spered d'ober eur vatimant...

Greet eo ar vatimant ha lakeet war ar mor...  
 Eet eo d'ar broiou pell, pell diouz ar Vro Arvor...

Kollet ar vatimant, kollet va den ivez...  
 Kenavo eürusted, kenavo levez.

Ma zeir zeizenn bremañ n'o dougan mui jamez...  
 Roet 'm-eus 'nez' en prof da chapel ar Werhez...

Bet zo bet eun amzer, eun amzer dremenet...  
 E karen, e karen hag e vezen karet...

*Kanaouenn euz Bro-Wened ;  
 liestoniet gand Jef AR PENVEN.*



Bre-mañ bloaz da Zan-tez Ka-tell, Zor-ti-as ar



flod eus a Vour-del, Zor-ti-as ar flod euz a Vour-del.

Bremañ bloaz, da Zantez Katell,  
Zortias ar flod euz a Vourdel. (2w)

Pa oent erru e-tal Penmarh  
O-devoe kavet avel awalh (2w)

Petra c'hoarvez gand Penmarhiz  
O terhel goulou-noz 'n o iliz ?

Kriz a galon neb na ouelje,  
E-tal Penmarh neb a vije,

O wel'd ar mor braz o ruziañ  
Gand gwad ar gristenien ennañ !

Neb a welje merhed Gwaien  
O vond d'an aot beb a-unan

Seiz intañvez ha seiz ugent  
O vond d'an aot en eur vandenn.

O houl an eil digand eben :  
— N'az-peus ket klevet kelou va den ?

— Kelou ho ten ha va hini :  
E-tal Penmarh 'maint o veuzi !

Malloz ! malloz da Benmarhiz  
A zalh goulou-noz en o iliz.

'Zalh goulou noz 'n o ilizou  
'Vid ma yel d'an aot 'r batimañchou

*Liestoniet gand Jef AR PENVEN  
(« Kanom laouen », Ar Falz).*

43.

## Ar habiten yaouank



Eur habiten yaouank euz a Vontroulez A zo bet marvet



e vestrez, A zo bet mar-vet e ves-trez.

Eur habiten yaouank — euz a Vontroulez  
A zo bet marvet e vestrez.  
A zo bet marvet e vestrez.

Pah erruas — ar helou gantañ  
E oa deuz an — daol o koaniañ (2w)

Hag eh erruas eur mesajer.  
Gantañ en e zorn — zo eul lizer.

— Kemerit kador — hag azezit,  
Setu ho lizer — hag henn lennit !

— Me n'eo ket na li — zer na paper  
A rafe din-me — kemer kador ! »

Oa ket al lizer — digoret mad,  
Ma ruille an dour — deuz e zaoulagad.

Oa ket al lizer — hanter lennet  
Etre e zaouzorn — oa distrempet !

— M'am-bije bet araog — ar helou-mañ  
Vijen ket deut — amañ da goaniañ !

Rag e Lannuon — zo eur bennherez  
Hag em halon-me — oa rouanez.

Setu hi maro, — me a chom bremañ  
War he lerh ebarz — ar bed mañ.

*Kanet gand Mélanie GEFFROY, Plufur.*

# TAOLENN

(SOMMAIRE)

N <sup>os</sup>		pages
19.	<b>P'oan o tiskenn da Vontroulez</b> (Quand je descendais à Morlaix)	3
20.	<b>Perag 'peus va dimeet?</b> (Pourquoi m'avez-vous mariée?)	4
21.	<b>Teir plah yaouank a Landevan</b> (Trois jeunes filles de Landévant)	5
22.	<b>Al lapousig er hoad</b> (L'oiselet dans le bois)	6
23.	<b>Pa oan o tremen Koad-an-Noz</b> (Quand je traversais le Bois-de-la-Nuit)	7
24.	<b>M'anaou eun den yaouank</b> (Je connais un jeune homme)	8
25.	<b>Biskoaz 'm-oa c'hoarzet kemend-all</b> (Jamais je n'ai ri autant)	9
26.	<b>'Tond d'ar gêr euz a Rostren</b> (En revenant à la maison de Rostrenen)	9
27.	<b>An anduillenn</b> (L'andouille)	10
28.	<b>Ar gevier</b> (Les mensonges)	11
29.	<b>Pôtrig an douar nevez</b> (Le petit gars de la terre neuve)	12
30.	<b>Ar serjant-major</b> (Le sergent-major)	13
31.	<b>Disul 'barz an overn-bred</b> (Dimanche à la grand'messe)	14
32.	<b>'N eur gêrig wenn</b> (Dans un petit village blanc...)	15
33.	<b>Tri martolod yaouank</b> (Trois jeunes marins)	16
34.	<b>Ma halon a zo fraillet</b> (Mon cœur est brisé)	17
35.	<b>P'edon war bont an Naoned</b> (Alors que j'étais sur le pont de Nantes)	18
36.	<b>Kemener Toull-ar-Bodou</b> (Le tailleur de Toull-ar-Bodou)	19
37.	<b>Nag en tu all da Bariz</b> (De l'autre côté de Paris)	20
38.	<b>Gwerz Marivonig</b> (La Gwerz de Marivonig)	21
39.	<b>Teñval an noz</b> (Sombre est la nuit...)	22
40.	<b>Ar Hloareg paour</b> (Le pauvre clerc)	23
41.	<b>An teir zeizenn</b> (Les trois rubans)	24
42.	<b>Gwerz Penmarh</b> (La Gwerz de Penmarc'h)	25
43.	<b>Ar Habiten yaouank</b> (Le jeune capitaine)	26

**Chants parus  
dans Skol Vreiz  
(N<sup>os</sup> 2 à 12)**

- **Ar Gwennilied** (S.V. N<sup>o</sup> 2)
- **Leuskit ho pro...** (S.V. N<sup>o</sup> 3)
- **Al logodenn er bod** (bilingue) (S.V. N<sup>o</sup> 4)
- **Krog eo ar rozenn ruz** (bilingue) (S.V. N<sup>o</sup> 5)
- **Kimiad eur zoudard yaouank** (S.V. N<sup>o</sup> 6)
- **Al Lez-Vamm** (S.V. N<sup>o</sup> 8)
- **Amigeu** (gallo) (S.V. N<sup>o</sup> 12)

Vient de paraître :

# GRAMMAIRE BRETONNE

par **Pierre TREPOS**

Préface de Pierre LE ROUX, doyen honoraire de la Faculté  
des Lettres de Rennes.

Un volume cartonné 23,5 x 12,5 cm, de 288 pages  
L'ouvrage peut être demandé à « **SKOL VREIZ** ».

Prix franco : 18 F.

« **SKOL VREIZ** », BREST - C.C.P. 2-248-25 Rennes